


KIMLADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

Chanson nevez



Var ton : An drouc-Hirnes (le mal du pays) Cetu ar flick a flock

Brétonet, me o ped, didostet da glevet
Eur himiad truezus, eun adieu trist meurbet
A ra de guervrois quen monet d'ar brezel
Eur martolot yaouanq maguet en Breiz-Izel.

An eis-varnuguent a viz maë me oa en faction
Oar bont ma batimant bars er rad en Toulon,
O hortos partia vit mont d'an Itali
Oar ben tri de goude, e cleemp ambarqui.

Me gred a oa tremenet an eur a hanter nez
A ma hamaradet oa et da repos;
Netra na double neuze ar silanç deus a noz
Met ar mor e vurmuri gant eur voues rust a gros.

Ma daou sorn a oa harpet oar ma c'harabinen
Dindan ma sreid ar mor bras ac an envrus dam fen
Heusi ran mignonet pa deçan da gompren
Na ve tre'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis me hunan oar bon mon batiment,
Ep test deus ma glahar, nemet ar firmamant,
Me gommances hirvoudi gant glahar ac anquen.
Pa deuas da jong din a baros Trabien.

Ma daoulagat oa troet oar su ar vilagen
Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerigen;
A pa deuis da jonjal em herent ac em bro
Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daëro.

Aboue an devez fatol a meus renquet quittat
A dont da guimiadi deus ma mam a ma sad
Bep nos pa ve cousquet em hunre o goëlan
Ac o jonjal'n o glac'har, nus a de a ouelan.

O devez leun a c'hlahar, o sisesper c'hoëro,
O devez deplorabl a carguet a canvio,
O quimiad anqueniuis a glac'harus meurbet
Me mo jonj ac'hanout queit a vir oar ar bed.

Gant ma herent er guer e ma nehamant
Hi ra ma ollo chagrin a ma brassat tourmant
Penezannonci de han breman d'ar brezel
Aoun meus d'o lacat gant an nec'h da eervel.

Pa glevont quement se a devont calonad
Goasoc'h vit an devez a renquis o huitat
Ac hi devo couag a oalh vit gallout supporti
Ep ma ranno o halon gant eur c'helo quen qri.

Houi sperejo evurus, o saent a saenteset,
Itron-Varie-Drue, ma guir vam beniguet,
Reit de ners a courag en affliction,
Reit de o hassistang, confortet ho halon.

Pelec'h eo et breman puerent a mignonet
An amzer-se quen douç hac agreabl meurbet
Pelec'h ma et breman an amzer eürus-se
A oan en Trabien a no toesq bemde.

Niget e pel d'ouzin an amzer quen eürus
A oan sambles guane'ch, camaradet joaüs,
Tremenet e vidon, marteze vit james,
Ar bonheur ac ar joa m'emp tanvet assambles.

Pa sei an nevez amser da gargan adare
Ar guez a vleuio caër ac a selio neve
Pa sei e oar e his ar guenidel er vro
Na nimp muin assambles beb sul d'ar pardonio.

Pa oan en o touez oad joaüs a laouën,
Mes breman on mantret, siouas! gant an anquen,
A ma oll flijadur so bout neur plaç disro
G sonjal gant glahar em herent ac em bro.

Huoi a velfe breman Yvonico mignon
O çaurman e hunan oar ar rad en Toulon,
O pourmen e hunan alies tal a nod
A daëro e zaoulagat a red var e siouchod.

Me ve c'hoas alies aseet oar eur roc'het,
Ma daoulagat trot evar su Breiz-Izel,
Mantret gant ae glac'har, a beuet em daëro,
O sonjal em herent so er guer en canvo.

O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniguet,
Pegouls a sono an eur ma c'hin c'hoas d'ho kuele?
Pegouls a erruo ar momet ac an de
A seuio da laquel fin dam c'haptivite?

O devez leun a souzier, devez a eurstet!
Me so chonjol enout heb heur a beb momet;
Doue trugarezus, hastet ar momet-se
Ma hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre ma oan o teplori oar bon ma batimant,
Ar loar a darsas souden ebars er firmamant;
Neuse me a velas us d'am fen o nijel
Eur guénidel bian evar su Breiz-Izel.

O ! prest din me, eonic, prest din da sivesquel
Ma ningin en ez plaç da bete Breis-Izel,
Da gonsoli ma herent quent vit quitat ar Franç,
A de gas betec eno comsou a esperanç.

Mes allas ! me n'allan quet veldout treuzi an ær,
Me a renç chom aman evel eur prisonnier,
Evel a oa guechal an Iraëlitet,
Pel amser o hortos an douar prometet.

Martese feus, eonic, scuiset da sivesquel,
O nijel dreus d'ar mor, o tont deus eur vro bel ;
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,
A repos eur momad en quichen mab Arvor.

Disquen eta, eonic, eur momet em c'hichen,
Ma scrivin eur lizer da gass da Drabien ;
A pa meus quel veldout ar bonheur dont d'ar guer,
Te vo da viana vidon eur messager.

Querquent evel ma vi digaoet en Breiz-Izel,
Te vo, eonic bian, ma messenger bian ;
Ta rei ma gourhemen er guer pa errui,
Ac a Irro dam zud a han d'an Itali.

Grit ma gour'hemeno d'an tad neuz ma maguet,
Mæs allas ! da mam baour, da houes na ri quet,
Rac bce zon partiet demeus a Vreiz-Izel,
Eouet da jouissa deus ar gloar eternal.

Lar adieu d'am broudeur a d'am c'hoarezet,
Goude d'ar belec coz a neveys ma badeet,
Na ancoue hini bet demeus ma mignonet
A lar de a sonjan enno en peb momet.

Lar de, eonic bian, pedi vidon bep nos
An Itron Varia, patrones ma faros,
Na deui d'am preservi en creis en dangerio,
A ma rai din ar c'hraç da return c'hoas d'am bro.

Mar a teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel,
Rancontri eun deves ma mignones fidel,
Lar dei a fo guelet Yvonic e mignon,
Hoher gard eun nosves oar e lest en Toulon.

Assur dezi er fad, dre broposiou touchant,
Meus bopret eviti eur garante ardant ;
Lar dei a ha breman ma c'horf d'an Itali,
Mæs mac'halon a vo da virviguen ganti.

Pa zeï a neves amser te a iel alies
Da gana, da fredoni, da guichen hi frenes ;
Perac ne allan me nijel eur vec'h guenoc'h
A mont de saludi betec e zi vel doc'h !

Mæs gra chars em flaç, a lar dei dre da son
Derc'hel jonc da viquen demeus e guir mignon.
Pec'hini zo, allas ! pell deus a Vreiz-Izel
En eur lest oar ar mor foetet gant en avel.

Pa vin en Itali en creis ar c'hombajo,
Creis an tan, ar mitraill, a cros ar chانونio,
Neuse eo a teuio ar muian da jonch din
Deus ar amzer eurus so nijet pell d'ouzin.

Mar teu din da vont tied gant eur boulet traitour,
Ac achui ma deio en eur vro estranjour,
Neur gouen d'an douar c'hoas quent evit mervel
Ma daoulagat a dro evar zu Breiz-Izel,

Ma daoulagat a dro evar zu Breiz-Izel,
Da laret d'am c'herent e adieu eternal,
Querent a mignonet, c'hui laro gant glac'har,
Graç dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quent evit finissa goulomp digant Doue,
Vit ar martolot quez bep sort prospèrite ;
Pedomp a vir galon Roue an armeio
D'em preservi e creis quement a dangerio.

Offromp c'hoas on veuio da Stereden ar Mor
Vit an oll soudardet deus on bro gær Arvor ;
Goulomp gant confianç pedomp hi gant ferveur
Da bellat dioute peb goal chanç a goal heur.

Rentomp meulideguez da arme goer ar Franç,
D'hon Prinç quen generus a leun deus a vaillanç,
Pere guitat o bro vit mont de gombati,
Evit independaç oll pobl an Itali

Canomp breman n'eur voues, canomp tout assembles
Ra vezint enoret meulet da james ;
Canomp ta, Bretonnet, deus fons on c'halon,
Gloar ac enor d'hon arme ! vive Napoléon !

Neb a neus composet ar son ma pen da ben
So ganet a maguet en paros Trabien.
A neuz he c'homposet oar an ton di c'hana,
Canet-hi ta, Bretonnet, vit n'em divertissa.



LA MARSEILLAISE

1^{er} Couplet

Allons Enfants de la Patrie,
Le jour de gloire est arrivé :
Contre nous de la tyrannie,
L'étendard sanglant est levé, (bis)
Entendez-vous dans les campagnes,
Mugir ces féroces soldats ?
Ils viennent jusque dans vos bras,
Egorger vos fils, vos compagnes !

Refrain

Aux armes citoyens,
Formez vos bataillons,
Marchons, marchons,
Qu'un sang impur,
Abreuve nos sillons.

Chœur

Marchons, marchons, }
Qu'un sang impur } Bis.
Abreuve nos sillons. }

2^e Couplet

Que veut cette horde d'esclaves,
De traîtres, de rois conjurés ?
Pour qui ces ignobles entraves,
Ces fers dès longtemps préparés ? (bis)
Français, pour nous. Ah ! quel outrage !
Quel transport il doit exciter !
C'est nous qu'on ose méditer
De rendre à l'antique esclavage !

Refrain : Aux armes, etc.

Chœur ; Marchons, etc.

3^e Couplet

Quoi, ces cohortes étrangères
Feraient la loi dans nos foyers !
Quoi, des phalanges mercenaires
Terrasseraient nos fiers guerriers ! (bis)
Grand Dieu ! par des mains enchaînées
Nos fronts sous le joug se ploieraient,
De vils despotes deviendraient
Les maîtres de nos destinées.

Refrain : Aux armes citoyens, etc.

Chœur

Marchons, marchons, {
Qu'un sang impur } Bis.
Abreuve nos sillons. }

4^e Couplet

Tremblez, tyrans et vous perfides,
L'opprobre de tous les partis ;
Tremblez vos projets parricides
Vont enfin recevoir leur prix, (bis)
Tout est soldat pour vous combattre :
S'ils tombent, nos jeunes héros,
La terre en produit de nouveaux,
Contre vous tout prêts à se battre.

Refrain : Aux armes, etc.

Chœur : Marchons, etc.

5^e Couplet

Français, en guerriers magnanimes,
Portez ou retenez vos coups ;
Épargnez ces tristes victimes
A regret s'armant contre nous,

Mais les despotes sanguinaires,
Mais les complices de Bouillé,
Tous ces tigres, qui sans pitié,
Déchirent le sein de leur mère.

Refrain : Aux armes, etc.

Chœur : Marchons, etc.

6^e Couplet

Amour sacré de la Patrie,
Conduit, soutiens nos bras vengeurs !
Liberté, liberté chérie,
Combats avec tes défenseurs. (bis)
Sous nos drapeaux que la victoire
Accoure à tes mâles accents
Que tes ennemis expirants
Voient ton triomphe et notre gloire !

Refrain : Aux armes, etc.

Chœur : Marchons, etc.

7^e Couplet

Nous entrerons dans la carrière
Quand nos aînés n'y seront plus,
Nous y trouverons leur poussière
Et l'exemple de leurs vertus, (bis)
Bien moins jaloux de leur survivre,
Que de partager leur cercueil,
Nous aurons le sublime orgueil,
De les venger ou de les suivre !

Refrain : Aux armes, citoyens, etc.

Chœur

Marchons, marchons, }
Qu'un sang impur } Bis.
Abreuve nos sillons. }

Chanson ar souben leaz nevé

1^{er} Couplet.

Ha tostet ama den nevé
Me gana d'eoeh va zon nevez
Ch. oui dre anaout ar soubien leaz
Se guire ont ganet va ar mez.

2^e Couplet.

La Reat oneus n'or song pennaus
Aroc ma zin d'ar guele alos
Ktnnig dand dud ar souben leaz,
A drest holl da daou bried Keaz.

3^e Couplet

Eur mintin ma hoch bet guelet
A hars a nautepe, daoulinet
Dirac Doue hagar belec
O lavaret ia Kalonnet.

4^e Couplet.

A Roue vit ho henorie
Mompho héfa hag ho tibre
O tansal hago fricota
Poent ezeo a gréonan Kana.

5^e Couplet.

Setu arruet ar soubin
Sonnit buan ta sonnerriens
Vit ma sebrimp holl a heas
Ama en nos a souben leaz.

6^e Couplet.

Ar vam deus he mereh, da gèlen
Tavout brema ar souben
Evit selaouit eur qental vad
A ra d'he merch arroe Dhe huitat.

7^e Couplet.

Va mor ehic paour dimeset out
Lavaret ia achu tout
Kenta teus brema Da ober
Eo goud deus piou a teus affer.

8^e Couplet.

Vit hoas va merch ne noussas quet
Petra ro béva bars a bed
Rag eur vatesseuisset eun an ti
Plassou all a guéniguer dezi.

9^e Couplet.

Mes hério oh pense lavaret ia
Heuc roet gorden d'austaga,
A den abet de sisquoulimot
Nemet Doue dre ar maro.

10° Couplet.

Kaer a po brema lavaret aiou
Beva a renkoeh ato o taou,
Eureuz ar bet ma emgaret
Burzeudic bras ma ne requet.

11° couplet.

Da genta va merch ezeo red,
Eun an ti Kavout boued,
A prena ennhan meur a dra,
Béteg déou seudel a diou loa.

12° Couplet.

Eur pouteuarne gant eu tribez
Eur billie hoten ecor, bodez
Eun Dalher eoat hagour rose
Eun toreh lardiehs gant eur billie.

13° Couplet.

Eur seabel eoat hageur dol vorred
Eur goutel Bénac et zeo red
Gant Eur guélé hé bars pepti
Anez cousquet var a lorsi.

14° Couplet.

Ma velez eo ber da hargant
Té lako ennhan plouza lanef
Diou Kollet eur pen véléz
A lez ar plein gant Dud a sanvez.

15° Couplet.

Va merch' eun an ti avanc, eals traou,
Da hounit poangni ato o taou
Vit ma hellot hé dalé pell,
Kavout argant, vit eun arbel.

16° Couplet.

Va merchi paour, ne Klasquet quet
Beva evel an itronnez et Ken
Gant ar Kich, rost hagar café
Ep songal petra vo goudé.

17° Couplet.

Labourit a bellit bréma,
Da hortos buguel da léva
Rag eur vech, po eun Daou pe dri
Raga a pim dé pommeun ti.

18° Couplet.

Ma n'ellet quet quaout quieh
Té rai souben an tri a zaieh,
Il' aghé Debra gant Da bried,
Var men en oabtet azéset.

19° Couplet.

Bara gounez et ho hennésie
Daou bried a garmad eun nozi
Et touez léaz chias ho hialigou
Pa veni oh tribi ols freigou.

20° Couplet.

Chuet ia ma channaouen
Chuet ia né ouzan mui
An hini a vov Ehoas
Eo Dezan coutinui.

Demezi mad ha fin fall

Eun devez e kaer Douarnenez
Oa kalz a dud el levenez,
Velet eur paotr o temezi
Brava den iaouank oa ennhu.

Ar verc'h neve demeuz he zu
Oa kaer he guelet var ar ru
Daou lagad glaz verve nne fenn
Gant diou chot flour oa ru ha guen.

Kalz merc'hed iaouank lavare :

« Ni zonje bize an den ze
« Balamour ou pesketer mad
« Var ar briz eur peotr delicat.
« Mes Mari gant he earic flour,
« Hor beg a laka d'eomp en dour
« Ha brema ni a c'hello c'hoaz
« Epad pelle bale da glask goaz.
« Demezet int hag eureuget
« Ho daou ez'int vaer da velet
« Doue gredomp ho bennigo
« O rei kalz bugale d'ezho. »

Ar martolod c'houneze mad,
He vreg en ti zalc'he urz vad
N'ho doa ket ho far sur er aro
Pep tra gant-ho ia mad en dro.

Nebeut bloaveziou goude
Erruet d'ezho bugale
An arc'hant a verra gant-ho
Jann a ve aliez mezo.

He c'hreg a lavar aliez :
« Jann ganid me a gav diez
Bugoligou d'eomp o zeu stank
An arc'han d'eomp ive a vank.

Va den ia neuze en egar,
He dreid a stok ouz an douar
He c'hreg hag he vugaligou
A ruille dindan an toliou.

Mari iaouank oa eur flourén,
Gar ket re al labour denn
Brema zeu da ball-galoni
Velet ar vuez rer d'ezhi.

Lezennou doue hag ar feiz
Morse n'oant bet doun en he c'hreiz,
Anez he dije gouzanvet
He foan gorf hag he foand spered.

Gand dienez ar vugale,
En ti a liez a lenve
Hag ar vam skuiz klevet ho c'hlemm
Gant-ho gemer eur geuneudenn.

He-unan pa hell kaout arc'han,
Var-eeun ez' a d'ar guld-ardant,
D'ar guin-ardan, d'an odivi
Daoust d'ar vizer zo enhe zi.

Var faillaat ia gant-og an traou,
Eleac'h unan emaint ho daou,
D'ober mizer d'ho bugale
Leac'h ho zevel hervez doue.

Pe ve en ti, ar vam, an tad,
Euz a noz oc'h en em grabat
Ho bugale gant naoun, sec'het
Buan er meaz a renk tec'het.

Ho c'hofic paour a zo goullou
Gant-ho izili dizolo
Met var ho beg ha ho daouarn
Eur guiskat krotouz evel skarn.

Froezen c'huero ar vesventi,
Al laou zo varn-ho o virvi,
A ziskuz d'ann holl ar flourén
Deut da veza eul loudouren.

En ti-ze a zo dienez,
Eleac'h vije bet levenez
M'hen dije bet ar goaz miret
Al lezennou evel m'eo gleet

Brema ar goaz p'en deuz arc'hant,
Betek krevi ev guin ardant,
Ar vreg a ra memes tra
P'he deuz ket nem lak da lenva.

Bretoned paour va mignouned,
Eux ar vesventi diouallet,
Rak honnez revin tud hor bro,
Rok an heur hor c'has d'ar maro !

Da unan dorro he c'houzoug,
Eun all a hasso euz ar groug,
Eben gant he goaz koutellet,
Eun all he-unan nem grouget.

Eur veac'h ve guerzet'pez ho deuz
D'all leac'h-all z'eont d'obez reuz,
D'all leac'h-all z'eont da glask hoac'hans
Aliez gavont dismegans.

Dimegans ha labouriou tenn,
Zo d'ar vesventi ar froezen,
Mervel aliez rok an oad
En dienez er meaz he stad.